

KIS-646 – E sigur ul levr gant Julia Kristeva

(GE – 29 08 99)

E 1966 e tiforc'hemp an daou dermen *eul* ha *ster*. Goulven PENNAOD o despize evel henn : “*ster* ur ger [a verk] e geñverioù hollek gant yoc'had ar gerioù all, an *eul* en eneb a verk lec'h un elfenn yezh en un emframm yezhañ dibar.¹” E se, en o savele evel rummennoù eus ar Yezhoniezh. Diwar *eul* e tevere *eulerez* b. “gwazva [...] o treiñ da werzhadoù yezhel [...] ar meizadoù“, hervez goulakadur labour Charles F. HOCKETT o vont d'an dud oc'h emzivizout evel da stlennijinenoù². Diouzh va zu, o kas pelloc'h studi an arhent bet boulc'het e 'm zezenn doktorelezh³, e 'm boe ezhomm ivez da gevenebiñ ar *ster* evel m' en kaver en arouez hag ar “*ster*” evel m' emañ en arhent a zibabis ober anezhañ an *eul*. Un digemmadur kentañ a voulc'his e 1971, dispis awalc'h : kinnig a raen “mirout *ster* er c'hemeradurioù ergorel pa ranker enebiñ ouzh kemeradurioù dangoreloc'h⁴”.

E gwir, ne zeuis a-benn da savlec'hiañ fraezh an *eul* e-keñver ar *ster* nemet e 1973 dre zezrannañ an hontkenderc'hañ er yezh evel *dec'heriañ eul*⁵ hag e 1986 e ser kevenebiñ *arhent* hag *arouez*⁶ diwar-bouez ar c'hevenebadur etre *kedouezañ* hag *emouezañ* a 'm boa savelet ken abred ha 1964⁷ ha klasket e brederouriekaat e 1966⁸. Stadet 'm boa, hag ur c'hammed bras oa evit un den deuet evel don d'ar Brederouriezh dre an Anadennoniezh, ne c'haller ket reiñ d'an *eul* ur staelad er preder hep distremen ar bevennoù a ra eus an anadennoniezh huserlek ur brederouriezh a 'n emouezañ – gant ar

¹ Sl. “Kentskrid d'ur studi frammadel eus ar brezhoneg”, La-01, pp. 7-46 ha dreist-holl pp. 45-46.

² Id., *ibid.*, p. 21.

³ *Le signal, description phénoménologique*, Paris, 1959.

⁴ KIS-057, La-04, p. 36.

⁵ Sl. “Ar sturyezhouriezh eus an eil d'an trede Emsav”, *Emsav*, 81, pp. 299-311 ha dreist-holl pp. 307 hh.

⁶ KIS-345, La-08, pp. 333-343 ha dreist-holl pp. 336 hh.

⁷ Sl. Da-64, p. 26, v° **KEDOUENZAÑ**.

⁸ Sl. “Studi anadennoniel ar gomz : ar c'hemmadurioù”, La-01, pp. 47-61 ha dreist-holl pp. 57 hh.

stadadenn-se e oan degouezhet dre emvataat eus an hentoù a voulc'he MERLEAU-PONTY etrezek domanioù anergerzh eus ar preder ha meizadoù evel ar *boud ragergorel* pe ar *c'hreud*¹.

E gwir, abaoe hogos daou gantved e kengerc'he war-du hevelep domanioù selloù ma n'eo ket hentoù ar brederourion. Da dest bomm brudet HEGEL e *Jenenser Logik* : “Spered an natur zo ur spered kuzh. Ne naou ket e rezh end-eeun ar spered ; spered eo hepken evit ar spered en anavez : spered eo ennañ e unan, met n'eo ket evitañ e unan.” Da dest ivez, arlakadennoù FREUD o kevenebañ an *endalc'hed enkelat (latenter Inhalt)*, a zo talvoud gwir ar realoù, ar prepozioù, an hunvreoù hag an *endalc'hed diskelat (manifeste Inhalt)*, a zo pezh a ziskouezont bezañ ; eleze o tiorc'hiñ, n'eo ket *eul* ha *ster*, met ur “ster² gwir diemouez hag ur “ster” gaou emouez erlec'hiet outañ. Evel a ouzer, amkan FREUD oa studiañ ar bred evel ur benvegad ergorel ; e rannañ a rae etre reizhiadoù a neuz alvezel, an elfennoù anezho o c'hoarvezout a zerc'hadoù (*Vorstellungen*) (naouus dre o “ster”, hemañ o tont eus ar merzhout) hag a gantaezadoù (*Affekte*) (naouus dre ur “gremm” o tont eus al luzadoù) ; alese e tenne ar bred hervez FREUD muioc'h d' ar *pezh astennat (res extensa)* eget d' ar *pezh devezat (res cogitans)* klasel, d' an traoù en egor eget d' ar spered.

Eviti da vezañ bet ganet hogos pergont vloaz war-lerc'h MERLEAU-PONTY, ez eo manet Julia KRISTEVA (1940-) gant an diarselloù ergorelour a voe re FREUD ha

¹ Sl. “Keal ar c'hreud e preder Merleau-Ponty”, KIS-524, La-11, pp. 115-130. Hogen en e dezenn, *La Structure du Comportement*, echuet e 1938 pa oa 30 vloaz hag embannet evit ar wech kentañ e 1942, e roe endeo MERLEAU-PONTY un divrazadur eus keal an *eul* : “L'unité des systèmes physiques est une *unité de corrélation* [sic, *relation* a vije bet dikoc'h], celle des organismes une *unité de signification*. La coordination par les lois, telle que la pratique la pensée physique, laisse dans les phénomènes de la vie un résidu qui est accessible à un autre genre de coordination : la coordination par le *sens*.” (3e emb., 1953, pp. 168-169). Evel henn e tegouezh an arroud-se e brezhoneg : “Unded ar reizhiadoù alvezel zo un *unded kevreizhel*, hini ar bevedegoù un *unded eulel*. Ar genurzh dre ar saveleñnoù, evel embreget gant an devezout alvezoniel, p' he arloer ouzh anadennoù ar beved, a lez un dilerc'h deveizadus diwar-bouez ur seurt all a genurzh : ar genurzh dre an *eul*.” Un evezhiadenn diwar vont : an termadurioù etre *sens* ha *signification*, amañ hag e lec'h all, zo ur skouer eus ar skoilhoù a gav ar preder war e hent e galleg.

² E *Geriadur ar bredelfennerezh*, Preder, 1983, e ran peurliesañ, ha n'eo ket bep taol hep tidegezh, gant *eul*, *eulad* da zec'heriañ keal ar “ster” er realezh hag en diemouez, o terc'hel *ster* evit amgant al lavar. Sk. : “[ar prezegoù, ar c'homzoù] o deus lec'h en hunvre evel eulad ha n'eo ket dre ar ster o deus el lavar” (GBLF. ¶ 484) ; sl. ivez ¶¶ 1193 □, 1217.

MARX. He levr *La Révolution du langage poétique*¹, skrivet etre 1968 ha 1973, a venn ober meiz war ar gweud hag an dispac'h evel “ruridigezh al luzad²” e bonegoù al lavar hag ar gevredigezh. Adkemer a ra reizhiadoù freudek an argerzhioù kentael (diemouez) hag eilvedel (emouez) e rezh an daouad *sémiotique-symbolique* en ur ardaoliñ dezhañ arvezioù eus ar c'hevnebad *eul-ster*. Hogen, a-raok he heuliañ en he dezrevelladoù, e kavan diziouerus spisaat un nebeut krefen a rummata gouiziadoniel.

An diskiblezhioù anaout a c'haller rannañ etre diskiblezhioù ungenezh ha diskiblezhioù dizungenezh. An diskiblezhioù ungenezh a vez savelet o divoud dre un ambredañ unvan. An Alvezonniezh da skouer a sti he anaout war an ergorennoù en ur ezvevennañ gwezhiadennoù an ergorañ e unan. An Anadennonniezh a sti he anaout war wezhiadennoù an ergorañ en ur ezvevennañ an ergorennoù. An diskiblezhioù dizungenezh en eneb a zisoc'h o divoud a gesoutañ ergorennoù ha gwezhiadennoù ergorañ. Er rumm-mañ emañ skiantoù an den. En o zouez hon eus bet tro da renkañ ar skiantoù a ra o divoud eus an arouez, eleze eus kesoutad un ergorenn alvezel, ar c'hanteul, hag ur wezhiadenn ergorañ, an arganteul – alese an anvad *ledergorenn* a 'm eus kinniget³. Evel n' hon eus gwelet c'hoazh⁴, ar ster zo arc'hwel an arouez e kement ma tec'han un derc'hañ e maezienn an emouezañ, an eul zo arc'hwel an arhent e kement ma tec'han ur fiñval e maezienn ar c'hedouezañ.

Merkomp diouzhtu ar c'hemm etre an doareoù ketep da savelañ anaoudegezh an arouez hag an arhent.

Dec'havalet e vez an arouez gant an emouezañ. E se emañ an emouezañ war an dachenn endeo koulz lavarout hag e tro da zoonaat anaoudegezh an arouez e kement ha henn dre argerzh an nadiñ-dasselliñ, eleze da chom warni war-benn digej he luniad e-lec'h bezañ kaset ganti trema he arouezed en ur he lezel war-lerc'h. Enmanus da

¹ Julia KRISTEVA, *La Révolution du langage poétique – L'avant-garde à la fin du XIX^e siècle : Lautréamont et Mallarmé*, kentañ emb. 1968, emb. klokaet Seuil, 1974, ademb. Points, 1985 (644 p.) [a vo teskanvet amañ RLP].

² “Irruption de la pulsion”. Amañ ez amprestan Kb. *rhuthro* da luniañ Br. *ruriñ* "emstrinkañ feuls (e-barzh)".

³ Sl. “Pennaenn an angouzout”, KIS-598, La-12, pp. 236-251 ha pp. 238 hh. pergen.

⁴ “Ar gouzrec'h o tec'havaelañ un arouez a c'hoarvez ennañ un treug o tifourkañ e maezienn an emouezañ e rezh ur c'heal ; e kemm, ar gouzrec'h o tec'havaelañ un arhent a c'hoarvez ennañ un treug e maezienn ar fiñval e rezh ur real.” (KIS-345, La-08, p. 336.) A-gostez e lezan amañ ar c'hoari gerioù keal-real evit mont dikoc'h a) dre bennanorioù, b) dre arverañ “fiñval” en e erdal ledanañ, eleze oc'h aroueziñ stuc'had a-bezh an erwezhoù korfel diabarzh ha diavaez.

vaezienn an emouezañ eo an derc'hañ, ar c'hediñ ster d'an arouez, trehontus eo avat ar c'hanteul, anezhañ an elfenn drael o tougen ar ster, ergorenn ar merzhout.

Gant estreget an emouezañ e vez dec'havalet an arhent — betek gouzout lavaromp : gant korf ar gouzrec'h pe gant ar gouzrec'h en e bezh. Korf ar gouzrec'h¹ a zoug an eul evel ma toug ar c'hanteul ar ster. Komz a *gediñ eul* evel ma komzer a gediñ ster zo enta kement ha darbenn ned eo ket ar *c'hediñ* ur gwezh eus an emouezañ. An arhent a anavezer, n'eo

ket a-gentizh dre an nadiñ-dasselliñ, met a-handizh dre an arseliñ kantouezel. An arseliñ ne bourchas nemet div rann eus treug an arhent : ar rann derou, an darvoud o c'hoarvezout er c'hefluniad ez eo ar gouzrec'h parzh anezhañ, ar rann dibenn, ar fiñval o c'hoarvezout evel dianveziad d'an darvoud. E kefridi an arseller e vez a) dienaar bezañ ur c'heñver a dreveziadelezh² etre an danvez rannoù derou ha dibenn, b) spisaat hag an kez keñver zo savelek (tro an arhent alvezel) pe ansavelek (tro an arhent bevedel). Evel pep diazalc'h kantouezel ne c'hell keñver an dreveziadelezh nemet bezañ goulakaet gant un derez tebegezh. E se, arguzennoù ouzhpenn zo da gaout evit dienaar bezañ ur c'heñver eulel, ansavelek, ha leteñvelaat treug an dec'havaelañ arhent ouzh treug an dec'havaelañ arouez — hag ez eus ; houmañ zo skarus : an eil treug a c'hell kemmañ naoz ha treiñ en egile³ — GOLDSTEIN & ROSENTHAL⁴ o deus diskouezet ez eus ur “c'hef boutin” etre treugoù ketep an dec'havaelañ arhent hag an dec'havaelañ arouez pe, en un diarsell all, e c'haller ober eus an emouezañ ouzh arouez un degouezh dibarek eus an erwezhañ ouzh arhent. Ken ez eus lec'h da zeskrivañ an arhent evel derez mann an arouez (evel ma teskriver an arhent alvezel evel derez mann an arhent bevedel¹) ha, dre se, da ober eus arhent hag arouez daou spesad eus an hevelep genad.

En hon amen ez eus bremañ peadra da zebazh ur rummenn ouiziadoniel d'an arhent. Hemañ a c'hoarvez ivez eus ur c'hesoutad etre ur pezh alvezel (ar c'hefluniad bezant e rann derou an treug, korf ar gouzrec'h parzh blein anezhañ) leteñvel ouzh ar c'hanteul hag ur pezh eulel (lennadus war ar fiñval a zo rann dibenn an treug) leteñvel

¹ Ar c'herienn-mañ a arveren e KIS-345, La-08, p. 342 ; da zilezel e ve mar doujfed forc'hellegezh an termen korf ” (sl. “Al. Leib er brederouriezh”, KIS-617, La-12, pp. 316-334). En hevelep arroud e kinnigen *keveul* "pezh o tougen eul".

² Sl. **AR GEMEZ EN AMZERELEZH AR GWERC'HENNOU**, in KIS-486, La-10, pp. 326-327.

³ A-zivout hevelep keñverioù luniadel ha dedroadel etre arhent hag arouez, sl. KIS-345, La-08, ar c'hevarad a-c'haoliad war ar pp. 336 & 337.

⁴ Sl. KIS-345, La-08, p. 337, kevarad diwezhañ ; KIS-545, La-11, pp. 280-282

¹ War an divoud, sl. KIS-412, La-09, pp. 458-459.

ouzh an arganteul². E se, arouez hag arhent zo daou spesad eus genad al ledergorennoù.

Un arvez all a zleomp ober meiz warnañ. Brastreset 'm eus an diri : arouez / arhent bevedel / arhent alvezel. An arhent alvezel evel m'en anavezer er Stlenneg a ampar pe a gendaol da amparañ arouezioù dibarek. Evel m' hon eus gwelet c'hoazh³, en arouezioù al lavar e vez laosk ar c'hesoutad etre kanteul hag arganteul, al laoskted o vezañ e dalc'h an eul o c'hwelañ er gouzrec'h ; en eneb, en arouez aregel, hini ar Stlenneg, ez eo sonnet ar c'hesoutad, divizet un arganteul spis evit pep kanteul adalek rann derou an treug, hag a-hed an treug ez arc'hwel ar c'hanteul evel an anadenn dredanwarellec ez eo hep ma emellfe eul ebet.

Savelek eo enta treug an arhent alvezel, emañ dindan destrizh rik, retvez. En eneb, ez anad an eul evel pennaenn a ansavelegezh. Na dalvez ket e teufe an eul da freuzañ pep destrizh. Aze ivez e naou un diri :

adalek ar peurzestrizh ez eo ar savelegezh betek an trec'houllo a stader en erwezhañ ouzh arhent hag ar frankiz keñverel o ren e par an arouez. Aze ivez ez eo dav klokaat an hanc'herieg, rak skort eo ha forc'hellek an termenou nac'hek evel “ansavelek”. Kudenn yezhouriezh houmañ hon eus bet tro da bleustriñ warni c'hoazh pa studiemp hevelepted ar beziadoù bevedel. Hans JONAS a verke “a sort of *freedom*” a vez gant ar bev e-keñver an danvez alvezel kesoutet outañ — “*freedom*” amañ a 'm boa kinniget treiñ dre *dizank*, *dizankted*. War un dro, da envel an derez destrizh keflen d'an dizank (destrizh diforc'h diouzh ar savelegezh — evel ma 'z eo diforc'h a-gemparzh an dizank diouzh ar rezid) e rae gant “*need*”, a 'm boa troet dre “*rankout*”¹. An daouad dizankted–rankout zo naouus d'ar beved — an dizankted end-eeun o virout ouzh destrizh an arhentou bevedel a vezañ ur savelegezh. Er penn all d'an diri, naouus d'ar vuhez, domani brientek an arouezioù, e kaver, en tu all d'ar retvez alvezel ha d'ar rankout bevedel, ur furm all a zestrizh a zo an *ergerc'hañ* hag ur furm all a drec'houllo (a *freedom* !) a zo ar *rezid* ; an *ergerc'hañ* zo bonlusk hon mont d'ar bed, a ra dimp dec'havaelañ ar bed e rezh *ergerc'hennoù* — pezh omp douget dezhañ gant ar c'hoant, ar garantez, ar gasoni ; ar rezid a ro dimp an dro ken da zibourc'hañ an *ergerc'hennoù*

² Mar be ezhomm eus hanc'herioù aesoc'h da embreger, e c'hallfed arverañ *keveul* hag *argeveul*. Diwar vont, e-keñver bezañs an un kedrann *-eul-* en termenou o tennañ a-getep d'an arouez ha d'an arhent, emañ an displetoù bihan evel ober “arganteul” eus ar *ster*, hag ar splet bras gouverkañ ez eo ar *ster* ur “vroustenn” eus an eul.

³ “Distabil ha kemmus eo an ere etre kanteul hag arganteul koulz hag ar c'heñverioù etre kanteulioù : e pep pred e vez ar steradur e dalc'h dialusk an eulioù (“sterioù” ampleg ar realezh), ar c'hevreadur en arvar gwariadurioù an dareulañ.” (GSTL. ¶ 2254.)

¹ Sl. KIS-540, La-11, pp. 215-218.

ha da ergorañ outo, eleze d' o anaout evel ergorennoù, ken d' o adpourc'hañ e rezh ergerc'henoù digent, eleze da genderc'hañ². Dav eo menegiñ amañ unan eus ar stummoù gwisket e par ar vuhez gant an destrizh bevedel, ar *rankout* : pezh omp boas hiziv da envel ar *struktur* ; pa yezhomp e *rankomp* kemplegañ da struktur ar yezh, pa gedvuhezomp e *rankomp* mont hervez struktur ar gevredigezh.

Gant ar *rankout*, an *ergerc'hañ* e teu war wel un arvez dialuskel en tu all d'an arvez diasavel ez eo an hini a venn deskrivañ hep mui luniad an arhent, an arouez, an eul, ar ster, h.a. Evit adkemer un droienn a voe diouzh ar c'hiz : petra a ra d' ar plant kreskiñ, d' al labous kanañ, d' al leon hemolc'hiñ ? ha petra a ra d' ar gouzrec'h ergerc'hañ, d' ar me ergorañ, d' ar c'henderc'her kenderc'hañ... ?

War-benn spisaat an durc'hadur da gemer evit gortoz ur respont, klaskomp da gentañ dezvonnañ rannbarzhioù an anaout. Emouezañ a reomp ouzh ar bed hag amparañ ergorennoù trehontus — derou an Alvezoniezh eo. Emouezañ a reomp ouzh hon emouezañ hag amparañ ergoradoù enmanus — derou an Anadennoniezh eo. Dre gesoutañ trehontus hag enmanus ez amparomp arouezioù — derou ar Vuhezoniezh (pe Skiantoù an den) eo. Hag an tri rannbarzh-se zo a-walc'h da enderc'hel kement hent a zo d' an anaout ? Degouezh an arhent dres a ziskouez n'eo ket. Dezhañ ez eus ur gedrann ergorel, trehontus d'an emouezañ, a gevaraez ober anezhañ ul ledergorenn, hogen ar gedrann all ned eo na trehontus nag enmanus d' an emouezañ. Ned eo na divoud d'an Alvezoniezh, na divoud d'an Anadennoniezh, na divoud d' ar Vuhezoniezh — divoud eo d' an diskiblezh a anve Hans JONAS *eine philosophische Biologie*, ur “Vevoniezh prederel”, a c'hallfemp gervel ur *Vevedoniezh*¹.

² War se, sl. KIS-598, La-12, pp. 238-241.

¹ Sl. “Hinienned ha treüned e preder Hans JONAS”, KIS-540, La-11, pp. 210-241 ha dreist-holl p. 210. Un diarsell *alvezel* eo en devoud hini ar Vevoniezh, test da se an araokadenn he deus graet en dekvloaziadoù tremen e rezh ar Vevoniezh volekulel. Hans JONAS hag, araozañ, imbours'herion evel Jakob von UEXKÜLL (sl. KIS-552, La-11, pp. 328-335), o tigej un diarsell *bevedel* spesadel, a enkrer un hent nevez d' an anaoudegezh eus ar beved. Amañ e sav ur gudenn a rummata gouziadoniel : anv zo eus un divoud nad eo nag enmanus na trehontus d'an emouezañ ha na c'hell neoazh bezañ naouaet nemet dre hentennoù an Anadennoniezh ; hogen un diskiblezh o kemer an anemouez da zivoud ne c'hell ket bezañ ur brederouriezh a 'n emouezañ ; aters : hag an Anadennoniezh a c'hell bezañ *ivez* un diskiblezh a 'n anemouez ? Diwar-benn ar c'hraf, sl. arzaeladur ur savlec'h kemeret gant Natalie DEPRAZ e sigur al *Leib*, KIS-617, La-12, pp. 322-323.

Penaos ober meiz war ar rankout ha war an ergerc'hañ ? O vezañ ma 'm eus en un doare harpet intent an arhent war intent an arouez, e ven tuet betek gouzout da bledañ da gentañ gant an ergerc'hañ.

An Anadennoniezh ne zianavez ket an ergerc'hañ, met ne c'hell ober stad anezhañ nemet en e erzerc'hadoù emouez, en dachenn a ra HUSSERL anezhi *kant ar c'hantaezañ*² (*die Gemütssphäre*): “buhezadoù evel kaout plijadur ha displijadur, prizañ en holl gerneradurioù ar ger, c'hoantaat³”. Splann ez a aze harzegezh prederouriezhoù an emouezañ : n'eo ket dav bezañ prederour evit gouzout e vez an emouezañ alies da ziwezhañ o kaout ditour eus ur garantez — houmañ o c'hwelañ en askre pell amzer hep rat d'an danvez kariad. Gant ar stadadenn-mañ, evel ma 'z omp bet gant dezrann an arhent, emamp heñchet etrezek “un domani all na trehoutus nag enmanus d'an emouezañ, « loet » e diagiz, e « kondon » an emouezañ hep bezañ e-maez ar bevañ — an hini a 'm eus kredet envel e lec'h all an *anemouez*¹”. Krediñ a ran daveñ d'ar studi a ris e 1990 war an emanglevoud², ma anvis *ketaezañ* an arvez haezadel eus an anemouez, doubleür “askreel” eus ar c'hedouezañ, evel ma 'z eo ar c'hantaezañ an arvez haezadel eus an emouezañ, doubleür “askreel” eus ar c'hantouezañ. Dre soliañ war azonoù navel o c'hoarvezout war un dro eus dic'houzvez hag eus diseblanted ar c'hlañvour ouzh e sezi, e skritellis *erougañ* ar “pennlusk d'an anaout ken anemouez, ken emouez, hag en e arvezioù ken gouezadel, ken haezadel³”. Plantañ en doare-se peulioù linennañ en tu all da harzoù an emouezañ ned eo ket dilezel hentennoù an Anadennoniezh ; d'ar muiañ e ve reiñ da houmañ bevennoù nevez, ober dezhi tremen eus par *an emouezañ ouzh an emouezañ* da hini *un anaout a 'n anaout*. E gwir, hon eus heuliet un hent d'an diagiz, eus an arouez omp aet d'an arhent, eus ar ster d'an eul, eus an emouezañ d'an anemouez hep kavout troc'h e nep lec'h dirak hon c'hammedoù ; kenkoulz e c'hellomp mont gant an hent gin hag e-keñver an anemouez doareañ an emouezañ evel “un anaout kendalc'het dre araezioù all”, evit kevelc'heriañ CLAUSEWITZ.

² Al. *Gemüt* deveret eus *Mut* "stad askre, toniezh noa ; kalonded" zo nes dezhañ Br. *kaoued* ; etredaouiñ a ran en droidigezh, *kaoued* o vezañ dikoc'h, met hep remzad evit c'hoazh e brezhoneg ar preder, *kantaezañ* o vezañ an termen hollek boas (kv. troidigezh c'hallek RICŒUR : *sphère affective*).

³ “[...] Erlebnisse des Gefallens und Mißfallens, des Wertens in jedem Sinne, des Wünschens [...]” (*Ideen I*, Felix Meiner Verlag, 1992, p. 220 [197]).

¹ KIS-617, id., p. 323.

² “Gl. *cénesthésie*, [...]”, KIS-381, La-09, pp. 275-285 ha dreist-holl pp. 278-280.

³ KIS-381, id., p. 280.

Koulskoude, astenn hentennoù an Anadennoniezh en tu all da harzoù an emouezañ ne spir ket da respont d'an aters stignet a-zioc'h : ober anv eus *Gemütssphäre*, reiñ ur staelad da verkoù an ergerc'hañ e-barzh maezienn an emouezañ ne ra ket meiz war ar perag na war ar penaoz eus an ergerc'hañ. Un diskiblezh all eo a sammas ar gefridi, ar Bredelfennerezh, oberenn un alamaneger all — evit da FREUD ha da HUSSERL bezañ kemprediz, ne voe etrezo darempred ebet. Tra ma 'z eo pennaenn kerzhed an anadennoniour an emdenn diastal etrezek ur sell digejet a bep engwezh kantouezel, e c'hoarvez en eneb kerzhed ar bredelfenner eus un emell don ouzh don e kantouezelezh ene an den — e vred ; diouzh un tu, un arvestiñ, diouzh an tu all, un embreger-damkanañ ; an hentenn wiriañ evit hennezh eo kevanlen e zeskrivadur, evit hemañ gwerc'h e emellerezh ; ar blein da reizhiad an eil eo ar me trehontel, da reizhiad egile andon “dregizel” an ergerc'hañ.

Naouus d' ar freudegezh eo an doare ma tanze an ergerc'hañ. Endra chom e-maez divoud an Anadennoniezh geneliezh ar *Gemütssphäre* evel a du 'rall geneliezh an emouezañ e unan, e kemer FREUD da zivoud orin ha troioù ar bred. E ober a ra a briz treuzfurmiñ argerzhioù e solwezioù : an ergerc'hañ ne vez ket arouezet gant ur verb met gant ur pennanv : *al luzad (der Trieb)*. Dezhañ e vez ardaolet perzhioù alvezel un nerzh, ur gremm ha diwarnañ raktreset ur Vredoniezh diwar batrom ar Fizik. Ar bred zo un astenn hep mui d'ar bevedeg, hemañ displegatus e arc'hwelerezh dre bennaennoù ar Fizik (kevandalc'h ar gremm, gwreznerzhoniezh, emreoliata), al luzad o vezañ, er c'hetal etre korf hag ene, etre kreud ha bred, leuriad an eil en egile¹. E se, e vez ergorelaet ar bred e rezh ur *benvegad (psychischer, seelischer Apparat)*² ha direet an emouezañ d' un arc'hwel eus ar reizhiad merzhout-emouezañ deskrivet he unan evel stagadenn da bennadeilad ar bred, ar reizhiad diemouez³. Hevelep arlakadurezh vrizhouiziel a raje eus ar Bredelfennerezh ur meni Alkimiezh ma ne zeuje an embreger d' he sachañ er-maez eus he barokiezh. FREUD e unan endeo e dibenn e vuhez a zistaole e savlec'hiadoù kentañ hep lakaat, gwir eo, en o lec'h ur savlec'hiad solietoc'h : “Arlakadenn al luzadoù zo koulz lavarout hon gwengelouriezh. Boudoù gwengelek eo al luzadoù, meurdezus en o andesaveladur.⁴” N'eus moarvat hiziv bredelfenner ebet o tezevout realezh e c'houziviaded hervez saveleñoù ar Fizik. Alese ar skalfad skolioù dispaket diwar-lerc'h ar gwastadour viennat, a zo test o liested hag o bividigezh eus

¹ Sl. GBLF. ¶¶ 976, 1118.

² Sl. GBLF. ¶ 91.

³ Sl. GBLF. ¶¶ 236, 590, 888.

⁴ *Neue Folge der Vorlesungen zur Einführung in die Psychoanalyse*, (G. W., XV, 101, 1932), sl. GBLF. ¶ 1024.

bezañs ur graoñell a werc'hegezh en embreg elfennadel. Skolioù zo chomet war dachenn ar parañ — ar Vezekniezh he unan ned eo ket deuet a-benn da reiñ un despizadur prederel bastus eus ar c'hleñved, pezh na vir ket outi a vezañ efedus. Reoù all a glask reiñ ur sol skiantel nevez d'ar Bredelfennerezh er brederouriezh huserlek ha heidegerek evel BINSWANGER ha MALDINEY, el Lavaroniezh evel LACAN, en Arz evel Nicolas ABRAHAM⁵, e welet hon eus, pe c'hoazh en Denoniezh strukturel. Tamm ha tamm ez eskor skourroù nevez d'ar Brederouriezh nad int mui prederouriezhoù an emouezañ hag ar me trehontel, hep bezañ prederouriezhoù an diemouez evit kelo. En orin an kez skourroù n'emañ ket ar Bredelfennerezh hepken. En 19t kantved endeo, MARX a lakae war wel amlegadoù kevredadel an emouezañ hag, en 20t, HEIDEGGER gant keal ar *Mitsein*¹, MERLEAU-PONTY gant keal ar *c'hreud*² a zigoras hentoù na sankent ket er broezioù ma arloezas FREUD e re, na oant ket estren dezho evit kelo.

Sigur an notenn-mañ, e verkañ a raen a-zioc'h (p. 104), eo oberenn Julia KRISTEVA, *La Révolution du langage poétique*. Va amboaz n'eo ket dezrannañ al levr e-keñver an amkan a verke dezhañ e aozourez — diskouez ez eo al luzad an nerzh dispac'hel o troc'holiañ al lavar hag ar gevredigezh — met dinoiñ dodennoù ha lankadoù devezout a-geñver, n'eo ket gant darvoudoù Mae 68, met gant buhez kempredel ar brederouriezh.

SEMIOTIQUE, SYMBOLIQUE, SIGNIFIANCE

En he levr e ro Julia KRISTEVA sterioù dibarek d'an daou dermen kentañ. Ar *symbolique* (g.) zo urzh an arouez (*signe*) evel elfenn ar voneg ez eo al lavar “e kement ma 'z eo divoud « formel » rik, eleze m'emañ e dalc'h ur c'hevreadur pe ur jedoniekat³”. Ar *sémiotique* zo urzh ar c'horf e kement ma 'z eo ar c'horf lec'h ar *sémiosis* — despizet evel pezh en diemouez a zo andon ar ster emouez : ar c'horf zo “bepred kevannodet endeo gant ar *sémiosis*⁴”. Hemañ en deus da welout gant “an arloezañ ha *tued* luniata al luzadoù, met ivez gant an *argerzhioù* adanvet *kentael* o

⁵ Sl. “Nicolas Abraham hag ar varzhoniezh”, KIS-644, La-13, pp. 85-98.

¹ Sl. “An dra hag an den e preder Heidegger”, KIS-587, La-12, pp. 148-181 ha dreist-holl pp. 150 hh.

² Sl. “Keal ar c'hreud e preder Merleau-Ponty”, KIS-524, La-11, pp. 115-130.

³ “comme un objet strictement « formel », au sens de : relevant d'une syntaxe ou d'une mathématisation” (p. 17).

⁴ “toujours déjà investi de *sémiosis*” (p. 19).

tilec'hiañ hag o tazbec'hiañ gremmoù war un dro gant o enskrivadur⁵”. Hevelep kemm etre *sémiotique* ha *symbolique*, etre ar *sémiosis* (e kement ma 'z eo ur meni rakster diemouez) hag ar *ster* evel m' emañ el lavar, a glot a-walc'h ouzh ar c'hemm a lakaomp etre an *eul* hag ar *ster*, gant an diforc'h ma kennot an *eul* an anemouez ha dre se ma piaou un erdal ledanoc'h

eget ur *sémiosis* a-zalc'h ouzh an diemouez freudek. Hep diwelout an

kez kemm, e rin amañ gant (*an*) *eulel* hag (*ar*) *sterel* a-gevatal da

(*le*) *sémiotique* ha (*le*) *symbolique*. An darempred etre eulel ha sterel a ra an aozourez anezhañ *le procès de la signifiante*, o tisoc'h gant al lavar evel luniad sterel — gerienn a droan enta dre *argerzh ar sterelaat*. “Andisrann e vez an div vodelezh en *argerzh ar sterelaat* a ampar al lavar, ha daelerezh an eil hag eben a zesavel rizhoù ar prezeg (kevellañ, travezhañ, arlakaat, barzhoniañ, h.a.) : kement eo ha merkañ e vez gant al lavar « naturel » modoù diseurt a genvelladur etre eulel ha sterel.¹”

Da verkañ eo e tarbenn Julia KRISTEVA deskrivadur ar bred gant FREUD en e furm orin, eleze en e ziarsell ergorelour : ar bountoù bevedel, dezho ur gremm alvezel, a zifourk er gedvuhez², a dreuzfurm dre arloezadoù savelek al lavar hag ar gevredigezh. Ar gouzrec'h zo direet d' an diemouez ha bez' ez eus anezhañ un “ijinenn eriunañ³”.

LA « CHORA » SEMIOTIQUE

⁵ “le *frayage* et la *disposition* structurante des pulsions, mais aussi les *processus* dits *primaires* qui déplacent et condensent des énergies de même que leur inscription” (p. 23). Sl. ivez GBLF. ¶¶ 505, 987.

¹ “Ces deux modalités sont inséparables dans le procès de la signifiante qui constitue le langage, et la dialectique de l'une et de l'autre définit les types de discours (narration, métalangue, théorie, poésie, etc.) : c'est dire que le langage dit « naturel » tolère différents modes d'articulation du sémiotique et du symbolique” (p. 22).

² “les poussées biologiques sont socialement captées, dirigées et agencées de manière à produire un excès par rapport aux appareils sociaux” (p. 14).

³ “Ce que nous désignons par *signifiante* est précisément cet engendrement illimité et jamais clos [de la « machine désirante »], ce fonctionnement sans arrêt des pulsions vers, dans et à travers le langage, vers, dans et à travers l'échange et ses protagonistes : le sujet et ses institutions” (p. 15).

Padal, e-lec'h ober anv eus an *diemouez* (reizhiad eus kentañ arlakadenn freudek ar benvegad bred) pe eus ar *se* (unan eus tri ensav an eil arlakadenn), e ra an aozourez gant an nevezc'her *chora*⁴.

Amprestañ a ra hGr. *cwvra* (egorenn, esaou, entremez, tiriad gouzalc'het) o taveiñ d'an arver a rae PLATON eus ar ger en *Timaios* (§ 52) da aroueziñ en un diarsell trabedel un egorenn ananvadás, hep unded, anhaezadás, a zo e diagent ar bed, an anv, al leñvenn, sez ma 'z eo da gement a zo war zont. PLATON a arbouez an doare retvezek hogen andoueel — dre ma 'z eo distabil, andien, war gemm ha war zont dalc'hmat — eus ar *cwvra* anvet gantañ c'hoazh an daskenvod (*uJpodocei'on*, diarlenn : "goulestr, ispoull") a zo un esaou hep neuz, n' o deus al lavar nag ar poell krap asur warnañ, na c'haller diraez nemet dre ur meni poellata bastard.

Anat eo e c'haller denesaat da dermenoù PLATON termenoù FREUD pa zeskriv ar *se* evel henn : “diemouez eo e endalc'hedoù, eztaol bredel al luzadoù, [...] mirlec'h kentañ ar gremm bred ; [...] dispis eo ar vevenn etre ar se hag ar me ; [...] n'eus ket a harzoù fraezh etre ar se ha seulad kreudel al luzad ; [...] ar se zo ur rouestl, ur c'haöz ; [...] n'eus ennañ framm ebet.¹” N' emañ ket pell kennebeut, evito da zont dre hentoù all, stadadennoù HERDER : “an den zo ur *sensorium commune* trebadus²”, MERLEAU-PONTY : “Va c'horf n'eo ket hepken un ergorenn e-touez re all, [...] bez' ez eo un ergorenn haezus ouzh an holl re all, o tasseniñ ouzh an holl sonioù, o taskrenañ ouzh an holl livioù, o pourchas d'ar gerioù o ster kezivik dre an doare m' o c'hendouez.³” En hevelep diarsell e c'houlaka Anton EHRENZWEIG ar *c'hwilerviñ diemouez* d' ober reizh war an dec'havaelañ eul a-zalc'h hervezañ ouzh an argerzh kentael freudek⁴. Diouzh va zu, e 'm eus kredet komz eus “noz diabarzh ar fiñvoù eulel o kengroaziañ dizehan er c'horf⁵”. Etre FREUD hag ur prederour evel MERLEAU-PONTY ez eus daou ziforc'h pennañ : da gentañ, endra venn hemañ *deskrivañ* an dec'havaelañ emouez hag anemouez gant an oadour pe ar bugel,

⁴ A zezneuzian Br. *kora* g. ; Gl. *chora sémiotique* a c'hallfed ivez treiñ dre Br. *esaou eulel...* (sl. RLP, pp. 22 hh.)

¹ GBLF. ¶ 159.

² Meneget gant MERLEAU-PONTY, sl. KIS-345, La-08, p. 337.

³ “Mon corps n'est pas seulement un objet parmi tous les autres objets, [...] il est un objet *sensible* à tous les autres, qui résonne pour tous les sons, vibre pour toutes les couleurs, et qui fournit aux mots leur signification primordiale par la manière dont il les accueille” (*Phénoménologie de la perception*, Gallimard, Paris, 1945, p. 273).

⁴ “THE UNCONSCIOUS SCANNING”, *The Hidden Order of Art*, 1967 ; tr. gl. : *L'Ordre caché de l'art*, Gallimard, Paris, 1967, pp. 66 hh. Sl. ivez KIS-345, id., p. 337.

⁵ Sl. KIS-345, id., p. 337.

ez eo amkan FREUD *displegañ* geneliezh an den⁶ adalek e c'hanedigezh en ha dre e zarempredoù ; d' an eil, aketus e veze MERLEAU-PONTY da zaveñ an devoudoù dezho o unan dre garzhañ pep preder kent ha betek ar meizadoù resañ d'ar reiz o tont etre hon sell hag “ar pezh a zo”, alese an ergrafoù a chom war e lerc'h, ar *c'hreud* da skouer, bihan o niver, nemet o deus evel an oberenn arz “o buhez hogos en he fezh dirazo¹” ; ouzh kemm, FREUD, o loc'hañ diwar gealiadurezh skiantelour e amzer, a savas brizhergrafoù a vez talvoudek dre leterc'had en embreg bredelfennadel, met anarveradus er-maez eus lavar ar vredelfennerion — ar brederourion evit tennañ korvo eus dizoloadennoù FREUD a rank tremen e skridoù dindan ur “c'hefredelfennerezh” war-benn diskoachañ diouzh o “ster diskelat” naturelour ur “ster enkelat” ken anheskadus hag an euladoù tennet gant ar bredelfennerezh eus dedaoladoù an diemouez.

Ha dres, eno emañ ar skoilh n' eo ket aet Julia KRISTEVA hebiou dezhañ en he levr. He fal diskleriet zo kevandodiñ degasadennoù diwezhañ an denoniezh, ar yezhoniezh hag ar bredelfennerezh pergen, e ser an danvezelouriezh daelerezhek : “[...] diastal ez engalvimp kealioù ha meizadurioù o tont eus arlakadenn vredelfennadel FREUD hag eus he dispakadurioù arnevez diseurt. Hevelep dasperzhiadenn zo dezhi da bal reiñ ur sol *danvezelour* (damkaniezh an arouesaat adalek ar gouzrec'h, e furmidigezh hag e zaelerezh korfel, lavarel ha kevredigezhel) da arakadennoù ar *boelloniezh daelerezhek*².” Ur prederour, evel un arzour, a sank bepred e wrizioù en atil an oberoù kent ha kempred, nemet e lak buan un gael, ken treleizhus, ken treloezus ha kennenn gwrizioù ar gwez, etre un diavaez estren hag un diabarzh piaouel ha digent. Julia KRISTEVA a ra pec'hed marvel ar prederour : tredizhet gant angerzh dispac'helour ar mare, dall war hent dall ar praksiz he doa dibabet bezañ epigon dezhañ, e lez gant re all an emell da vezañ dezvevet eviti. Andezvarn e tarbenn ar rummennoù freudek en ur dremen dreist ar bazenn rakwezat

⁶ “An denoniezh freudek zo un denc'henelezh”, (“L'anthropologie freudienne est une anthropogénèse”, Henri MALDINEY, *Regard, parole, espace*, L'Age d'Homme, Lausanne, 1973, p. 27).

¹ “Si les créations ne sont pas un acquis, ce n'est pas seulement que, comme toutes choses, elles passent, c'est aussi qu'elles ont presque toute leur vie devant elles” (MERLEAU-PONTY, *L'Œil et l'Esprit*, Gallimard, Paris, 1964, pp. 92-93).

² “[...] nous aurons constamment recours à des notions et à des conceptions empruntées à la théorie psychanalytique de Freud et à ses divers développements modernes. Une telle intervention a pour but de donner un sol *matérialiste* (théorie de la signification à partir du sujet, de sa formation et de sa dialectique corporelle, langagière et sociale) aux avancées de la *logique dialectique*” (RLP, *PRELIMINAIRES THEORIQUES*, p. 12).

rekis da lennadur testennoù FREUD, a zo diskar an adeiladoù brizhouiziel a gealiadurezh dibennaontekvidik ez int — gant ar spi ma eginno diwarno ur preder diles war an talbenn.

Ur skouer a roin eus ar gwargerzh a ra an aozourez dre berzh he sujidigezh damkanel. An danvezelouriezh hervezi a zieub anadennoniezh HUSSERL diouzh an amforzh voudoniel ez eo an ego trehontel (mard eo an *Ego cogito* amparus d'ar bed, petra zo amparus d'an *Ego* e unan ? ¹⁾

“*Ha ne zleer ket kentoc'h lakaat en argraf pezh a genderc'h ar « me » kentoc'h eget gwezhiadennoù an kez « me » ? Hevelep aters, pell a lakaat ar « me » barniat evel orin, ne ra evidomp nemet loañ an dodadel hag ar c'hoaladel evel diabarzh da argerzh ar sterelaat, hemañ ouzh o distremen, hag oc'h ober sevel un aters all : penaos e c'hell an dodadel a zo ur savlec'h a-berzh gouzrec'h bezañ bet kenderc'het ? Dre seurt eilpennadur, ne ezvevennomp ket argraf ar Steriañ (Bedeutung) e kement ma 'z eo dezgeriañ a-berzh ur gouzrec'h savlec'hiet (dodadel) a-dal d'ur gourzhdrec'h. Nemet e tiskouezomp ar Bedeutung, an Dodadel hag ar Gouzrec'h evel kenderc'hadus, evit ma trofe an holc'h etrezek an amplegadoù eulel o c'henderc'h en ur chom estren dezho. An eulel a ve neuze rakdodadel hag e diagent ar steriañ, dre m'emañ e diagent savlec'h ar gouzrec'h. En un erganad n'eus ket ur Ster rakwezat d'an ego o tezevout, met bez' ez eus kenvelladoù dizungenezh d'ar steriañ ha d'an arouez : ar c'hora eulel.²⁾*”

Dodennañ ur *c'hora*, un esaou eulel, zo degas an evezh ouzh an anaout anemouez a chom mut warnañ prederouriezhoù an emouezañ. Hogen mont etrezek an

¹ War se, sl. KIS-563, La-11, p. 410 ; ivez, evit an doare ma pleustr MERLEAU-PONTY war vac'h an diren anadennoniel, sl. KIS-517, La-11, pp. 73 hh.

² “La question ne doit-elle pas porter sur ce qui produit le « je » plutôt que sur les opérations de ce « je »-là ? Loin de poser le « je » jugeant comme origine, pour nous une telle question ne fait que placer le théorique et le doxique comme *internes au procès* de la signifiante qui les dépasse, et soulève une nouvelle interrogation : comment le théorique qui est une *position* de sujet, a-t-il pu être produit ? Par ce retournement, nous n'éliminons pas la question de la Signification (*Bedeutung*) en tant qu'énonciation d'un sujet posé (thétique) au regard d'un objet. Mais nous indiquons la *Bedeutung*, le Théorique et le Sujet comme *productibles*, pour que la recherche s'engage vers les conditions sémiotiques qui les produisent tout en leur restant étrangères. Le sémiotique serait alors un pré-thétique et antérieur à la signification, parce qu'il est antérieur à la position du sujet. Il n'y a pas de Sens préalable à l'*ego* cogitant dans une proposition, mais il y a des articulations hétérogènes à la signification et au signe : c'est la *chora* sémiotique” (RLP, p. 35).

anaout anemouez ha, drezañ, etrezek endon an anaout emouez a ra treuzfurmiñ boniek intenterezh an emouezañ : distremen an troc'h dangor-ergor¹, erlec'hiañ ar mont d'an diagiz ouzh an emdenn trema ar me trehontel..., e berr, nann savelañ keñverioù nevez etre meizadoù klasel ar brederouriezh, met dilezel a-vloc'h ar re-mañ war glask d' ul lavar prederel kevazas². Julia KRISTEVA hag he c'heneiled semiotikour³ ne gemeront ket hevelep diarbennoù. E-lec'h godeliañ diouzh un divoud digent armoù digent an anaout a zere, e wiskont un harnez harlikin a armoù kozh atoret eus an diskiblezhioù hag ar c'healiadurezhioù o ren — Anadennoniezh, Bredelfennerezh, strukturelouriezh, marksouriezh — an holl oc'h arc'hañ an titl a skiant, lod anezho o c'houl an Alvezoniezh d' o fimpatrom. E se, ez amprestont gouzrec'h an ergorañ hag an dodañ huserlek a gempennont, a zienkont, dre ober eus geneliezh ar gouzrec'h un argerzh eus an daelerezh enien d' an danvez ; ez ebarzhont ar c'houblad kevenebou diemouez-emouezañ freudek e rezh ur c'houblad eulel-sterel (*sémiotique-symbolique*) ; gant ar *c'hora eulel* e lak Julia KRISTEVA he biz war unan eus an divoudoù digent a venegen a-zioc'h, nemet e-lec'h mont dezhañ gant ur spered dibourc'h hag anaout ennañ ur pezh “n' en deus anv e prederouriezh ebet⁴” e tiffrae d'ober meiz warnañ diwar-bouez an displegadurioù freudek ha marksek dispredetañ : “An arc'hwelerezh eulel, e kement ma 'z eo amplegad d' an arouezel — eleze evel ur c'hevosoderezh eginokoc'h eget pezh e teu da vezañ goude an troc'h arouezel, met desezet endeo dre un trevnadur bevedel, ha bepred kevredigezhel endeo, istorel enta — a c'haller dinoñ a-raok pazenn an drec'h, a-raok kentañ diskeud an dodadel.¹”

¹ En arroud a-zioc'h e tianavez an aozourez ar c'hemm etre ar gevenepedoù *dangor-ergor* hag *ergorer-ergorad* intentet evel diabarzh d'ar gouzrec'h hag ar geveneped *gouzrec'h-gourzhdrec'h* etre bev ha bed : kemmeskañ a ra ar “gouzrec'h a-dal d'ur gourzhdrec'h” gant an ergorer “o todñ”.

² “Erlec'hiañ ouzh ar c'healioù “meizad”, “mennoz”, “spered”, “derc'hañ” ar c'healioù “ampar”, “kenvell”, “live”, “koubledennoù”, “paoelloù”, “kefluniadur” — ar poent loc'hañ = amzaelañ meizadur boas an *dra* hag e *berzhioù* Ø amzaelañ keal poelloniell ar gouzrec'h, hag an enlenadelezh poelloniell Ø amzaelañ ar ster *solia del* (diforc'hioù ster), ar ster evel forc'had [...]” (MERLEAU-PONTY, *Le Visible et l'Invisible*, p. 277, in KIS-517, La-11, pp. 74-75).

³ Sl. KIS-598, La-12, pp. 243 hh.

⁴ “[...] n'a de nom dans aucune philosophie” (MERLEAU-PONTY, id., p. 193, in KIS-524, La-11, p. 125).

¹ “Le fonctionnement sémiotique, en tant que condition du symbolique — c'est-à-dire comme une combinatoire plus rudimentaire que ce qu'il devient après la coupure symbolique, mais déjà mise en place par un ordonnancement biologique, et toujours déjà social donc historique —, est décelable avant le stade du miroir, avant la première esquisse du thétique” (RLP, p. 67).

Seul gerseüsoc'h eo hevelep sinkretegezh a-berzh Julia KRISTEVA ma oa en he c'herz peadra evit kas pelloc'h hentoù ar preder kempredel, da skouer kensavlec'hiañ holc'hoù diskibled HUSSERL e domani an *anemouez* gant an argeziadoù evit prederouriekaat an *diemouez* freudek, pe c'hoazh dioueliañ ar c'heñverioù don a ve etre *danvez* an danvezelourion, al *luzad* freudek, an *u{llh}* huserlek ha *kreud* MERLEAU-PONTY. Hogen stouvañ an hentoù ha treiñ kein d'an talbenn eo sevel keal ar *c'houra* evel o vezañ

war un dro an diemouez hag an anemouez, arzerc'hel un natur danvezel-bevedel d' al luzad, h.a. Ya, kerseüs eo e tibennfe meneziad gouiziadur an aozourez dre wilioudiñ diwar al logodenn-mañ : hon barzhoniezh zo feulzidigezh Eroz ha Tanatoz ouzh frammoù ar bed kevalour².

Dodenn levr Julia KRISTEVA, hervez m'en degemenn an titl eo al *langage poétique*³. Daou varzh, LAUTREAMONT, MALLARME, zo hervezi skouerius eus ar reveulzi a ve o treuzfurmiñ bonegoù al lavar hag ar gevredigezh. Evidon, e c'hallfe bezañ e tremenan hebiou da valzennoù, rak ur gefredourez “*furieuse d'intelligence*⁴” eo an aozourez, met pell on a vezañ ken feuls ha hi ha n' on ket bet evit mont betek penn ar 650 pajennad stank a ra he levr — ken kreñv evit gwir e kleven an damant he doa da zedelvout an tezennoù semiotikel d'an daou weudour dilennet.

PICASSO, er bloavezhioù ugent, a lavare diawelout “ur skiant a 'n den krouer”. Derou ar bed n'emañ ket er *c'houra*, met en nit. Skiantoù an den, diwar ma vennont bezañ *skiantoù*, a rank plediñ gant devoudoù *hollek* — kantreizh eo dezho, pa emgavont dirak an ober-krouiñ, ren un disav ha treiñ ken ouzh armerzh al luzadoù e bred ar c'hrouer, ken ouzh dialusk istorel-kevredadel ar bed ma vev. Anaout a rankont avat ez eus devoudoù a zo dreist diraez dezho dre an arbenn ma 'z int *dibarek* a-grenn, *unveziat* dre anien, an devoudoù a anvomp (resisoc'h : a ledanvomp, gwell : a c'hourzhdespizomp evel) *nit*. An *nit* zo un dilerc'h na c'hell ket skiantoù an den ober

² Louis LEMOINE, a berzhias e darvoudoù Mae 68 e Paris — tutat tro ! — a grenne speredegezh an amzer-se e stumm an aforism : “Seul vui ma argadan, seul vui ez orgedan.”

³ Diegi 'm eus o treiñ *poétique* amañ, ken pell diouzh ar ster en deus ar ger gant ar varzhed o unan emañ ar c'hemeradurioù a ro dezhañ ar skolioù diseurt a yezhoniourion hag a semiotikourion. Diouzh ret e rafen gant Br. *poetikel*.

⁴ “Furieux d'intelligence” eo titl ar chabistr diwezhañ (pp. 611-620), anezhañ un drompilhadenenn en enor d'an degemmadur semiotikel diouganet ur c'hantved 'zo gant LAUTREAMONT ha MALLARME, tonket da droc'holiañ al lavar hag ar Stad kevalour : “Ur c'hoz nevez zo o wezhiañ hag o krignat pep dodad” (“Une nouvelle taupe agit et ronge toute thèse”) zo frazenn diwezhañ al levr.

meiz warnañ, a-leteñvel gant an *eul* a ziskouezas MERLEAU-PONTY ez eus anezhañ un dilerc'h na c'hell ket skiantoù an alvez ober meiz warnañ¹. Mont war-enep da hentennouriezh ar skiant eo diren an eul d'e ampleadoù alvezel, an nit d'e ampleadoù brezel ha kevredadel — se eo koulskoude a ra Julia KRISTEVA a-gor gant semiotikourion he luskad pa venn ober eus an arz un dianlenad d'ar c'henniñvoù brezel ha kevredadel. Kement ha komz eus dilerc'h, un dilerc'h n'eo ken o semiotik eus skiantelouriezh an 19^t kantved a venne displegañ ar beved dre an alvez hag ar vuhez dre ar beved. Lec'h zo d'un durc'hadur all, an hini a loc'h eus “an den krouer”, a ra eus an nit an andon d'ar vuhez, eus ar vuhez ar pezh a ro ster d'ar beved ha, dre ar beved, kefleuniadur d'ar alvez — haeradennoù ar re-mañ nad int ket skiantel, nidel ne lavaran ket.

¹ Sl. a-zioc'h, p. 103, n. 1. Heñvel dra, ar *ster* zo un dilerc'h na c'hell ket skiantoù ar beved ober meiz warnañ.